

GUERZ

*Var sujet Nic. BESCONT ha Soph.-Juli VERAX,
greg CASTEL, pere zo bet condaonet d'ar maro an
30 eus a vis Guenveur 1841, hac executet an 19
eus a vis Ebrel goude, evit beza ampoesonet ha
lazet Rene CASTEL, Mestr Serrurier e Brest.*

“ Na c'hoanta dre luxur pec'hi,

“ Nac e sonch vil n'en em bliji.

9. Gourc'h. Doue.

Tec'h ar guin, deboch, levriou fall,
Pe da vijen e po tamall.

Var ton Güerz an Autrou Homo.

O brô guer a Vreiz-Izel ! cede te c'hoas lajet
Da rencout conta ennout an horrupla torfet.
Na vije biscoas credet ec'h êruje enni
Horreuriou qen dinatur, qen eûzus ha ger cri.

Mes comançomp hon recit, ha despeignomp ar c'hrim
A boulzas ar vuntrerien e fonç eus an abîm.
Eno e velot patant frouez al libertinach
A zigüez gant an impi bepret evit partach.

Ar paour qèz Rene Castel a voa un den honest,
E oll amezeyen voa eus a guementse test ;
Mes evreg, goaldebordet, mignonez da Vescont,
Eus e buez direglet na zalc'he mui nep cont.

Pell ma vije ar vertuz but o mignoniach,
Ne voa nemet an deboch hac an aoultriach
An angaje anezo el liam criminel

A unane assambles an daou vonstr quer cruel.

Alies greg Castel paour e doa er gourdrouzet
E dije un deiz benac certen en distrujet.

Allas ! nemet güirionez na lavare neuze ,
Rac deut eo d'accomplissa , sivoas , e fromesse .

En nôs , sez a vis guenveur e voe grêt an torfet ,
O rî da Gastel poeson er pez en d'oa evet ;
Gant ur gorden voe mouquet ha staguet e zaouarn .

Ret vije d'o c'halonou grêt a zyrr hac houarn .

Glèvit an anjanç horrubl eus ar vreg disordren :
Evit sponta e goas paour e stlap ul lincel venn
Dreisti , var bini e voa scrifet ar guer *venjanç* !
Hac evel ur squeud spontus varnezàn ec'h avanç .

Güelet e vije e merc'h hac hi er gomedi ,
Dreist oll pa vije peziou spontus ha meurbet cri ;
Augustina a lenne allies levriou fall ,
Pere gant an dud honest vo atao da damal .

Assuret voet voe güelet ha greg ha merc'h Castel
Ouz en treina dre e vleo gant un arrach cruel ,
Hac o diou ouc'h e ganna hac er laqat e stat
Da chom clân var e vele hep ellout labourat .

Greg Castel hac ar Bescont o devoa bet c'hoantê
Guervel greg Bescont un deiz dady Castel secret ,
Ha dont o daou d'e mouga ha da zêvi an ty ,
Mes Doue a espernas ur seurt maleur quer cri .

Arc'hrimou-se a vije chomet c'hoas pell euzet
Aues greg Bescont e d'oa e speret trubuillet ,

Hac a roas da c'houzout e cuz ha leun a spont
E voa enterret Castel adrec ty ar Bescont.

Ul lizer a voe scrifet neuze incontinent,
Gant calz a brecaution d'ar pennou important;
Ar justic voe informet demeus an hirvoudou.
Hac a yas da dy'r Bescont, hanvet Kerouriou.

An douar a voe toullet gant un acqed soignus,
Hac e cavjot corf Castel en eur stat 'horreus',
E zaouarn paour amaret, hac en dro d'e c'houzoung
Ar gorden en doa'r mouquet o coeza varechoug.

Calz demeusa zoudardet avoa betcommandet
Evit conteni ar foul voa eno diredet.
Ouspen ur pêvar mil den a Vrest, a Recouvranc
A voa diredet eno, hac a grie venjanç!

Arrêtet e voe neuze ar Bescont hac e verc'h,
Greg Castel, e merc'h ive hep dale var o lerc'h.
Casset da brison Qemper, ma vo grêt o froces:
Tri-uguent eus a destou en em gavas el lez.

Eao e voe disclêryet voa bet ampoesonet
Ar paour qèz Rene Castel, ouspen, assassinet
Gant ar muntrerien infam, touellet gant Satan,
Pere zo dign da viqen da lesqi en e dan.

O tra estranch hac horrubl! clêvet en tribunal
An tadoc'h accuseverc'h, ar verc'h emam ractal,
Ar vestrez e amourous, hac emâ e vestrez,
Gant pini en d'oa bevet e stat fallagriez.

Ahnin, goude rapportchou eus an tri-uguent test,
Voet certen deus ar c'hrimou coumetel e kær Brest
Var ar maleurus Castel gant e vreg ha Bescont,
Hac o diou merc'h, crim eûzus a garg an oll a spont,

- Ar Procultur ar Roue eus al lez criminel**
- A zav, en eur lavaret gant un ton solemnel :**
- » Er guera Vrest, arguenta eus an departamant,
 - » Un den zo disparisset ebars en ur momant.
 - » Na eller qet en effet beza goall estonet ,
 - » Rac ur pasport en devoa evit güir qemeret.
 - » E famill a lavare e voa êt en beach ,
 - » Evel en d'oa anoncet evit e avantach.
 - » Ur mis benac adremen pa damaljot d'ar vam
 - » Ur c'hrim nevez a laqe e peb calon estlam ;
 - » Gouzout a rêr eo lazet Castel ar maleurus ,
 - » Ar plac mazo enterret, pegueument m'oa e cus.
 - » Daoust da oll brecaution autoret an torfet
 - » Evit clasq cuzat o c'hrim na beza soupçonet ,
 - » Dorn Doue abouez varne, n'achapint qetountâ :
 - » Ar c'hrim zo disoloet pa sonjer nebeuta.
 - » Ar c'horfa voa enterret adrec ty ar Bescont;
 - » En eur e laqat eno Bescont a gav e gont ,
 - » Rac ne sonjas qet biscoas penos quer tost d'e dy
 - » E teujet da glasq Castel ha d'en disenterri.
 - » Pebes arvest deplorabl a velân-me amâ !
 - » Var banq ar grimalet eo azeet bremâ
 - » Un tad, ur vam, o diou verc'h, o fêvar muntrrien ! ..
 - » O Doue ! pebes horrol etoues ar Gristenien !
 - » Ur c'hrim quer bras a c'houlen un expiation
 - » Evit ar bividiguez hac ar Religion.
 - » Graç na deuyo mui biqen, dreist oll er Finister,
 - » Seurt torfejou d'alumi ouz Doue ar goler ! »
 - » Güelit crisder e c'halon d'Augustina Castel :

Daou devez goude ar c'hrim qen horrubl, quer cruel,
 E redas d'an dançou nôs, joaüs bras ha masplet,
 Evel ur c'hef an ifern, ar plac'h fall debordet !

Goude an oll discoursiou eus an difennerien,
 Pere zo bet selaouet attantif gant peb den,
 Goude nao devez debat, an autrou President
 A zisclêry e zint clozet d'al lez eno presant.

Ur silanç eus ar vrassa a vroe eno ractal,
 Pa sav er za'r President demeus an tribunal;
 Peb den a zo ampresset gant un nec'hamant vras
 D'e zelaou gant calz silanç evellen pa gomzas :

- » Un dra eûzus meurbet eo, eme ar magistrat,
- » Ha terrubl goal spouronus, mar querer evessât,
- » An oll torfedou infam a occup ac'hanomp
- » Abaoue tremen eiz dez, glac'harus bras deomp.

- » Deus ur c'hostez, mar creder an accusation
- » E zeo un tad a famill, brêvet oll e galon ,
- » Disenoret gant e vreg, goal-drêtet hed seiz vloas,
- » Ampoesonet ha lazet dre e famill , sivoas !

- » Deusurc'hostez all, petra a afflich horsellou?
- » Pêvar accuset amâ hor c'harg a hirvoudou :
- » Ar verc'h hac an tad , ar vam hac ar verc'h oc'h accus
- » Hac an eil hac eguile a grimou qen eûzus !

- » Nep mors na arrêt anê , na ne spont an dud fall:
- » Ar muntr, ampoésonamant, aoultriach, na tan-goall.
- » Ne vanq nemet an icest er proces criminel ,
- » Evit offr an oll grimou , sivoas, da Vreiz-Izel.
- » Ah ! nac én a zo eûzus an affer horrupl-mâ !
- » Pean a vez o caout james crimou evel outâ.
- » An oll dorfedou brassa en em gay dastumet

► Er proces horrubl ma zomp aboe pell occupet.

Ractalec'h adres ar gomz d'an autrone jureed,
Ha gant ur galon mantret en deus dê lavaret :

► Hit , autrone , hit d'ar zal deliberation ,

► Ha decidit gant furnes hac ur speret güirion.

Da ziv heur ha qart eo bet ar juri antreet
En deliberation , da beder sortiet ;

An autrou chef ar juri , goude' le ordinal
En deveus bet pronocet var an dud criminal.

Autrou President al lez en e za zo savet ,
Ha gant ur galon mantret en deveus lavaret :
Greg Castel, ha c'houi, Bescont, ho taou oc'h condaonet
Da rancoutsouffr armaro balamour d'ho torset.

C'houi, Augustina Castel, dre ma zoc'h yaouanc c'hoas ,
Zo condaonet d'ar prison er spaç eus a zeg vloas ,
Ha goude an deg vloas-se tremenet er prison ,
E chomfot deg vloavez all dindan suspicion.

Ha c'houi , merc'h Bescont , a zo rentet e liberte ,
Hit... heuillit hent ar vertus etro pad ho pue ;
E santimanchou christen laqit mad ho calon ,
Hac heuillit ar principou eus ar religion.

EXECUTION.

Disul, c'hoec'h heur eus an nos, Bescont ha greg Castel
▲ éruas e qær Brest , ha lajet er c'hastel ,
Daou vêleg eus Guemper o asiste en hent ,
Ha dre gomzou consolant o nerza a glasqent .

Au deiz varlec'h , lun , nontec demeus a vis ebrel ,
Exortet gant daou vinistr an Doue éternel ,

An daou grimal mantret demeus o c'hrim eüens,
A abandon o ene da vadelez Jesus.

Vardro unech eur anter int quittet ar c'hastel,
 En eur c'har disoloet voa an daou grimmel ;
 An daou vêleg voa gante hac a brezegue dê
 Nonpas sonjal mui er bed, mes hepqen en Doue.

Pa voent rentet var ar plac m'oa ar chaffot dresset,
 Greg Castel gant courach vrás varnâ a zo pignet ;
 Neuze e zeo daoulinet, hac e deus recevet
 An absolen, o poqat d'ar C'hrist dei presantet.

Qerqent en em abandon d'an executerien
 En eur invoqi Doue betec ar goal dermen.
 Bescont ractal zo iveau eno executet :
 Cetu an daou grimal paeet o goal dorset.

Ur foul demeus ar vrassa voa diredet eno ,
 Da velet daou grimmel o receo ar maro ;
 Allas ! ur guriosite barbar hac inhumen
 Ne diefe biqen antren en un ene christen.

REFLEXIONOU.

Tadou ha Mamou christen, Mestri ha Mestrezet ,
 Teulit sple d'ar vugale a zo dêc'h confiet ;
 Evessait o freposiou , o c'hundu , dalc'hit cont
 Peseurt levriou a lennont, peseurt tud a bentont.

Habituit anezo da vonet d'an ilis ,
 Evit, vel güir Gristenien , asista en ofic ;
 Grit dê caout horrol demeus ar güin , an ebatoù ,
 Ar guêvier, libertinach, hac eus an nosveziou.

Sellit, & va broïs quer, pini eo horrubl fin
 Eus zu den abandonet d'an debauch ha d'ar güia !

**Sellit greg Castel, Bescont dindan hach ar bourreo
O receo an tol marvel ! ... crenit ! ... ha c'houi er c'hleo ?**

**Cetu aze fin horrubl tud hep religion,
Pere nemet a sonch fall na vagont o c'halon.
Tec'hit ar viç distera, rac unan coumetet
A drein un all var e lerc'h pa n'en deo qet trec'het.**

**O peguen douç eo e stat da un den afêcon
Pehini e peb amzer, vertuzus a galon,
A.gundu ur vuez vad, direbech, hep angen,
Hac a zo hed e vuez güir squer da hep Christen !**

**Goulenomp digant Doue d'hor preservi hepriet
Eus a-guement a else noazout deomp var ar bed.
Bevomp vel güir Gristenien, goulenomp ouz Jesus
Da veva en tud honest hac en tud vertuzus.**

**Ar charite a gommand deomp da zont da bedi
Vit an oll e general, menes vit an impi ;
Lavaromp peb a *Bater*, peb a *De profundis*
Evit an daou maleurus maro dre ar suppliq.**

FIN.



E Montroulez, e ly LÉDAN, e traon tu ar Var.